

BUEZ

AN ACTROU

SANT GOULC'HEN,

Escop bet e Leon, ha patron
eus a bares Goulc'hen, er
memes escenti.

Var ton Guers Sant Guillem.



E MONTROULEZ, e ti LÉDAN, e rü ar Vur.


~~~~~+

## AVERTISSAMANT.

Prononcit ato al lizeren G, evel er c'hom-  
zou gant, goulou, galetez. Exempl : ginidiq,  
pegement, gevier, etc.

Guelet al Levr en eus great an Aotrou  
GONIDEC, var lavar hor bro.

~~~~~\*

P E D O M P.

NI a esper, Aotrou Souveren,
Dre verit hor patron Goulc'hen,
Or miret dioc'h drouc var an douar,
Hag e rofot pers deomp en ho cloar.

—

Aotrou Sant Goulc'hen, p'o pedomp,
Bezit Alvocad evidomp ;
Ha supliit hor Zalver Jesus
Da veza ouzomp truezus.





CANTIC.

SPERET-SANTEL, ni o supli,
Roit sclærigen d'or c'hundui,
Ma c'hellimp cana pen-da-ben,
Buez an Aotrou Sant Goulc'hen.

Hor bennos a roomp da zaou zen:
Deoc'h, Claudan, ha deoc'h, Cologuen,
Zo bet tad ha mam d'hor Patron,
D'ho peza deut en hor c'hanton.

Er bloas pemp cant daou-ugent,
O c'heuil an exempl eus ar zænt,
E zoa distremenet ganto an treiz,
Eus a Vro-Saoz e douar Breiz.

Pa ambarqas an daou bried,
Da dreuzi'r mor ar Vanec'h hanvet,
Al lestr a voe, dre heur Doue,
Douguet e pleg-mor ar c'hontre.

Eno e touarjont genta,
Ar plaç a c'halver Odena
Voe a fournissas d'an dud geiz
Eul lochen evit o logeis.

An nos-se memes Cologuen,
Erruet ma voa e zermen,
A c'hanas eur mab a dlie
Beza eun deis sant bras en eê.

Doue er roas d'anaout d'an dud
Neuze souden dre eur burzud,
Raç ec'his ne doa banne dour

Da voëlc'hi ar c'hrouadur paour.

Claudan, e dad, dre e beden
A obtenas eun eienen,
A zervichas da gemense,
Hag a red ato abaoe.

Ar brud a yeas eus ar miracl
Bete eun aotrou charitabl
A voa Godian e hano,
A chomme e qichen eno.

Digas a eure gant truez,
Da zoulaji o faourentez,
Hag en em offras da Glaudan
Evit paeron d'e vab bian.

Var ar fount en hanvas Goulc'hen;
Ha dre ma voa den a voyen,
Ha dizer e creiz madou bras,
Evit e vab en adoptas.

Laqat a eure e vezur
Evel pa vije e grouadur,
E zierren hag e scolia
A reas gant ar sourci vrassa.

Ar c'hrouadur dre ma cresqe
E doujanç Doue e c'havanse,
Ha profita a reas er studi,
Qement ma fêze e vestri.

Echuet gantan e glaciou,
O tarempred an ilizou,
Hag e vedita ar feiz,
En em ocupe nos ha deiz.

Goude e commanças sarmon,
Mæs gant qement a onction

Ma teue ar bobl a foul d'e glêvet,
Hag e zeant quit convertisset.

Ar burzudou a voa qer stanq,
Ma teuas aon d'hor bêleg yaouanq
Oc'h en em velet qer brudet,
Na vije a orgouil tentet.

Gouzout a rê eo eur poezon,
A zo egis ar c'hontron
Qenta er boüejou deliqata,
Mar manqer o tont d'o zalla.

An orgouil, ma na zioüialler,
En em gemesq er mad a rer,
Hag a chench an œuvrou caëra
En pec'hejou ar re vrassa.

Rac-se, da evita ar venim,
Eus eur poezon qer malin,
E sonjas voa guell tec'het,
Hag en em denna eus ar bed.

Mæs pa glêvas e dad-mager
En devoa en disclæriet panher
Hag heritour eus e oll vad,
E falle dezàn e guitât.

Godian en devoe chagrin,
Hag a opozas d'e zessin
E otorite eus a dad,
O lavaret dezàn : va mab,

Me meus bete-henn o casset,
Leun evidon eus a respet,
Ha ne meus guelet o pe bet
Manqet da zenti en effet.

Petra zigag deoc'h ar frouden

D'ober dime eur seurt angen?
 Ha manq oc'h eus-u a zillat?
 N'oc'h'u qet perc'hen d'am oll vad?
 Emaint oll en ho courchemen;
 Va oll joa ve heviziqen
 E laqach an dourn da zispang
 Eus va oll leve ha chevanç.

Na glêvin mui eur seurt qêlou
 O sortial eus ho qenou,
 O pe c'hoant da zispartia
 Diouc'h eun tad o car ar muya.

Goulc'hen a respontas neuze
 D'e dad-mager, en hanv Doue:
 Va zad qer, na sonche qet deoc'h
 Em be clêm d'ober ac'hanoc'h.

En tuont e ven da eun ingrat,
 Ma n'o qaren qet, va zad mad,
 Oc'h eus great qement a zispign
 Da rei din education dign.

Hirra ma c'hellàn memori
 Da veza antreet en ho ti,
 Ne meus cavet eus o pers.
 Nemet madelezou em c'hers.

D'an tad en deus va anjandret
 Ha d'ar vam e deus va ganet
 Ne doun qet oblijetoc'h
 Eget n'en em gavan deoc'h.

Tad ha mam e voant din naturel,
 C'houi zo va zad spirituel
 Oc'h eus procuret d'am ene
 An aonaoudegez a Zoue.

Geneoc'h e meus desqet muia
 E garet hag e zervicha ;
 Evel ma c'harnodis parlant,
 C'houi a reas din qentel excelant.

O c'houlen ouzin p'evit tra
 Oan leqêt gant Doue er bed-mâ,
 E tesqach din a c'her a c'her
 Intantionou va C'hrouer.

Evit e anaout, e garet,
 En deveus Doue o crouet ;
 Livirit : Va Doue, me o qar
 Dreist qement zo var an douar.

C'houi rê din stouet bep mintin
 D'e adori var va daoulin,
 Hag ar memes tra diouch'an nos,
 Qent eget monet da repos.

M'em bezo sonch en dra vevin
 Eus an exempl mad a roach din,
 Rac ne ordrenach din netra
 Na reach oc'h-unan ar c'henta.

Heuliet em eus oc'h avizou
 Bete en ho custumou ;
 Hogen pell en em gavan c'hoas
 Diouch'ar berfection, siouas !

Geneoc'h e tesqis a vian
 Ne zeus affer nemet unan,
 An traou all zo lugederez,
 Exceptet ar zilvidigez.

Allas ! terrupla calonad
 Eve eun deiz deoc'h-u, va zad,
 Ma chomfen ber, Doue ra viro !

En affer importanta zo.

P'am be convertisset an oll,
 Mar diguez genen en em goll,
 Petra ve, siouas! a rofen-me
 E vit rançoni va ene?

Jesus a roas ar guzul-màn
 D'an nep a c'houlennas ountàn
 Petra a ranqe d'executi
 E vit en em savetei.

Mar dezirit beza parfet,
 Guerzit oll ho madou var net,
 Distribuit-o d'ar beorien,
 Ha deut d'am heuil neuze laouien.

An den yaouanq, da fur ma zoa,
 Re bete neuze en devoa,
 Miret al lezen het-a-het,
 A yeas en rout contristet.

Ar Scritur a verq perac tra,
 Abalamour pinvidiq e voa,
 E preferas madou dister
 Da gompagnunez hor Zalver.

Mab Doue a daolas gant estlam
 Var ar binvidigez ar blam,
 O prononç e vezo a boan gre,
 E zai den pinvidig d'an eê.

Rac-se, va zad qer, me ho ped,
 An danvez o poa destinet
 Da rei din-me en heritach,
 List-o gant ho qerentiach.

Pe g'it a gerot anezo,
 Me fell din, cousto pe gousto,

Oc'h avis voa lies a veach
Laqat va lestr e savetach.

Bizet em eus eur plaç distro,
Ne ma qet er meas eus ar vro;
M'en em den dy, gant ho conje,
Da zonzal em zilvidigez.

Var ræzoniou qen dereat,
Ne vouye Godian e dad
Petra da ober, c'hoarzin, gouela,
An eil hag egile a ra.

Ec'his ma voa eun den Doue,
E galon gant joa a lame,
O velet ar zantelez pur
Da beini e vize e vab fur.

Ar c'hostez-all voa melconi
O sonjal ober disparti;
Eur gombat estranch a zavas
Etre an natur hag ar c'hraç.

Houman e deveus ar victor;
Eur sacrific interior
Evel oc'h hini, Abraham,
A reas evit beza divlam.

Opozi ho vocation
Dre eun exces a affection
Am eus evidoc'h conservet,
Ve dispen ar pez am eus grêt.

Hed ar veach ne glasqen qen
Nemet ma vijac'h guir gristen;
Qentre m'o savis eus ar font,
Me oc'h offras da Zoue pront.

Meuli a ràn e brovidanç

Da veza acceptet va offranç;
 Mar coez biqen daëlou ountàn;
 Ne deo qet gant qeus er roan.

Hogen sansibl voa ar c'himiad,
 Ha ma permete din va oad,
 Beva egis oc'h eus dessin,
 Me zalc'he mad deoch bete'r fin.

Ar pezh am c'honsol, va fillor,
 Eo ma c'houn o pezo memor
 Hed ho puez eus ho paeron,
 Ha cassit geneoch e galon.

Grit eur memor particulier
 Eus ahanon och an auter;
 Ne regetàn digant Doue
 Nemet m'en em velimp en eê.

An daëlou a droc'has a grên
 E gomz eus a gostez Goulc'hen
 A boezas d'e dad Godian,
 O vouela druz greomp eun ean.

(*****†*****)

SANT GOULC'HEN EN DEZERT.

Var ton Guers Sant Yan.

SEC'HET ganta daëlou e dad,
 Goulc'hen a ziblaças timat
 Etreze ar plaç en devoa bizet.
 D'en em denna er meas ar bed.

En eur c'hoad ma voa stanq ar goez,
 Bordet a bep tu a strouez,

Eleac'h ne d'oa nep delempret,
E teuas da ober e retret.

Eun orator pe eur chapel
Er plag-se a reas da zevel,
A zo bete an deiz hirio
Bizitet gant tud a bel bro.

Galvet e zê e Beniti,
Sourci zo bet d'e re pari,
Anez, goude daouzec-cant vloas
Ne deo qet possubl e ve c'hoas.

En ermitach-se discuizet
Diouc'h an oll tregag eus ar bed,
E comanç cundui eur vuez
Par d'an ini a ia an ælez.

N'en deus qen occupation
Nemet ar gontemplation
Demeus ar madou eternal
Hag al lectur spirituel.

Evit qelen hag instrui
E rê diagent e stadi,
En esper sicour pec'herien
D'en em denna eus ar vouillen.

Brema e lèz oll a gostez
An oll zonzou a zianvez,
Destumet enna e-unan,
Da zelaou moez ar Speret-glan.

En em lança rê e galon
Var zu Doue en oræzon,
En entremars na zortie
Da heuill actou eus ene.

Custumet voa a vianig

Da ober abstinanç a gig,
 O tremen gant eur pred bemdez
 A rê var-dro an abardaez.

En dezert e teuas da zoubla
 E osteriteou qenta;

Alies e poursue e yun
 Bete an diveza eus ar zizun.

James dre c'hout na faltazi,
 Mes evit en em sustanti;
 Pa voa ret dibri hag eva,
 E qemere dour ha bara.

Pa deue'r c'hoant cousquet d'e drec'hi,
 E zê eun neubeut da repozi,
 Evit guele ha linceliou
 En devoa eun dornat deliou.

E gis p'en em divije cloastret,
 Ne dea ne deue enep andret,
 Bemdez voa custum eur veach,
 D'ober an dro d'e hermitach.

E tri andret var e drepas,
 En devoa dispozet teir groas
 E pere e rea station,
 Och ober e brocession.

Er plaçou-ze ma c'harrête
 Evit eno pedi Doue,
 Hag e chomme eun amzer vras
 Prosternet dirag ar groas.

Ne ouffe exprima ar joa
 Hag ar blijadur en devoa
 O reprezanti d'e speret
 Pegeit en deus Doue er c'haret.

Piou a gompren pris eun ene
 A zo coustet e c'hoad da eun Doue?
 Teuzi a rê oll e galon,
 O contempli ar bassion.

Hag evit renta fournis franq
 Ar pezh zo c'hoas enni a vanq,
 Ne zeus nep na nep tourmant
 Na deuje d'anduri contant.

Pa zonje er boaniou qalet
 En devoa Jesus gouzanvet
 Evit tud ingrat ma zomp-ni,
 Ne vouye pe'varzu trei.

Brema e c'hadmir an excès
 Eus eun evelep carantez;
 Brema e teu da zeplori
 En excès an ingrateri.

Evit derc'hel e gorf sujet
 Dindan ar yeo eus ar speret,
 Ne baoues ouz e gastiza
 Ato ouz e gontrolia.

Mar ou eus lod eus ar soufrang,
 Omp foulet mad en esperang
 Da gaout perz e gloar hor Zalver
 Eme'n ebestel Paol ha Per.

En esper-ze e teue da c'houzaon
 Gant joa, ar zec'het hag an naon,
 Ar riou, an domder, an estre
 Ha pep seurt incommodite.

Ne zeus comparêzon ebet
 Etre'n oll boaniou eus ar bed
 Hag ar bouez fournis a c'hlocar

A roi Doue da nep er c'har.

Ha pa n'or pec'het morse,
E ve necesser gouscoude
Ober pinijen en amzer,
Evit meritout ar saler.

Qemense a zisque patant,
Goulchen dre e vuez penitant;
Beva rê eas ato e den just,
Ha c'hoas e rê pinijen rust.

Na ni, pec herien entrezomp,
Tud losq ha digalon ma zomp,
Non eus-ni brassoc'h ezom
Eget n'en devoa ar patron.

En em garget ez omp a zle
Dirag ar justiq a Zoue,
Ha c'hoas ne reomp difre ebet
D'en em dizama a bec'het.

Der c'hoat glas e roer a beac'h,
Na petra roer d'ar c'hoat seac'h
Ma er rebut an artizan,
Ne vezo mad nemet d'an tan.

Sonjomp en dra-ma pepini,
Oc'h antren en e beniti:
Ne get aoualc'h admira'r zænt,
Ret eo deomp bale dre o hent.



BURZUDOU SANT GOULCHEN.

Var ton Guerz Santez Genovefa.

NE hellas get ato cuzet
Oc'h an dud e vuez secret,

Ar c'huez mad eus e zantelez
En em sqignas a bep costez.

An dud er c'hontre da ganta,
Pa vouezjont e pe leac'h e voa,
En o ezom da glasq soulach
A yê d'e gaout d'e ermitach.

Ma'r en em gavent afflijet
Enep façon, pe gant clemvet,
Pe gant nep affliction all,
Ma'r gerrue nep affer fall.

Dezàn o deveze recours,
Hag oll e recevent sicour;
E galon voa carantezus,
N'en devoa netra da refus.

D'ar re glàn e roe ar yec'het;
Ha d'ar re a veze e pec'het,
Dre e beden hag e guzul vad,
O zenne oll eus o goal stad.

D'ar goazet voa libr ar passach
Evit antren en e ermitach,
Hag en e chapel e c'hellent
Donet da bedi pa garent.

Mæs a gren e voa difennet
An antre oc'h an oll merc'het;
Hogen a zcaveas ar c'hlos,
Voa ordrenet dezo gortos.

Ar brud eus e vuez santel
A redas oll dre Vreiz-Izel,
Ma teue a bep leac'h an dud clàn
D'en em recomandi dezàn.

D'an ampoent, e broyou an Nord,

E douar Leon hed ar bord,
 E tiambarqas eun arme
 A ras cals ravach er c'hontre.

Evit outo en em zifen,
 Prinç Leon, an aotrou Even,
 P'ini en em zale he bepret
 Er gær a Lesneven hanvet.

A reas destum e ber amzer
 Oll habitantet ar c'harter,
 O cass urz d'e oll sujedet
 D'en em gaout prest ganta armet.

Mæs abars prezanti ar gombat,
 O veza clêvet ar brud-mad
 Eus eun ermit a chome tost,
 E zeas d'e gousulti e post.

Pa erruas, e edo Goulc'hen
 E c'hars ar groas en e beden,
 O recomandi da Zoue
 Ar malheur a dud ar c'hontre.

Ar chont evel m'er remerqas,
 Divar e varc'h a zisqennas,
 Hag o tiavanç gant e dud,
 Evit rei dezàn ar zalud.

Servicher da Zoue, emezàn,
 Me zo expres deuet amàn,
 Da glêvet geneoc'h pe façon
 Gallout sovetei bro Leon.

Guelet a rit an extrendet
 E peini e zomp rentet:
 Eul lejion a dud barbar
 Zo disqennet en hon douar.

Hag ervez o c'hustum sovach ;
 Dre ma zeont e reont ravach ;
 Ne qet avoalc'h ganto pilla ,
 Violi a reont ha laza.

Ha dirol an tan da zêvi
 Ar pezh n'ellont da dransporti ;
 Nemet Doue a laque'n dorn ,
 Eus a Leon ne vano corn.

Goulc'hen a respontas d'ar c'hont :
 M'ar grit var va feden nep font ,
 Aotrou , it d'ar gombat a fo ,
 Sur e'r victor dêc'h var nezo.

Var e c'her , ar prinç gant fizianç
 A ra d'e zoudardet avanç ,
 Ar barbaret en heur genta
 A gomanças da argila.

Forcet e voent dre'r vaillantis
 Hag ar gourach a leonis ,
 Pere en em gave certen
 Var ar bromessa a C'houlc'hen.

En esper gounit o listri
 Ar barbaret o reculi
 A deue d'en em denna d'an aod ,
 Mæs en o c'hont e qefjont faot.

Rac a leonis eur vanden
 En em leqas a ziarben ,
 A droc'has etre'r mor hag hi ,
 Da viret outo d'ambarqi.

Divar lerc'h e voent poursuet
 Gant eun arme forz animet ,
 En o araoc e voa eur varen ,

Ha ne d'oa moyen d'e zremen.

Enqet er façon en daou du,

Ar barbaret evel c'houibu

A guezze a steyou var ar plag,

Dibot ini a echapas.

Al lestri a zavas gouel

Da vont en youl mor hagavel;

Pella ma c'heljont diouc'h ar vro,

Eb caout pelloc'h c'hoant da zistro.

Mæs defot tud d'o c'hundui

E chomas cals eus o lestri

Gant o c'harg hag o aqipach

Hag eun darn vras eus ar pillach.

Ar c'hont Even victorius

A ras e antre triomphus

Er memes deiz e Lesneven

E creis e zoudardet laouen.

Rac-tal e zes gant e arme

Da renta graçou da Zoue

Eus ar victor, n'a douet

N'ad oa gantàn e zoa roet.

Ravisset oll eus a joa,

E roas an urz da gonfia

Ar pennou bras oll assambles

Da zont da goania d'e balez.

Pa voant en em gavet er zal

An officerien jeneral

Hag ar c'hont prest da azeza,

E teuas en e speret eun dra.

Ancounac'het en devoa cren

Dont da drugareqat Goulc'hen.

Ha da rei dezàn ar c'hélou.
Eus a issu mad e armou.

En em zantout a rês mezus,
Hag e teuas da c'houlén excus
Diouch ar re en devoa confiet,
E c'hordrenas coania bepret.

Mareqat a ra qer buan,
Hag o tont gant eun trein bian,
Er gost a draon e cavas c'hoas
Goulc'hen stouet dirag e groas.

Ac'hano n'en devoa fachet,
Abaoue ar c'hont partiet.
Ne ra nemet pedi Doue,
Da rei issu mad d'e arme.

Ar prinç d'an daoulin a stouas,
Ha da zorn ar zant a boqas,
Ha lavaret dezàn : va zad,
Savit... gonezet ar gombat.

Goulc'hen en e za a zavas,
Hag etreze'n eê e sellas,
En eur drugareqât Doue
Da veza grêt graç d'ar c'hontre.

Neuze gant eur vizach laouen
E lavaras d'ar c'hont Even :
Aotrou, dalc'hit en ho memor
Digant piou oc'h eus ar victor.

Eur mestr mad eo da zervicha,
Rac-se bezit fidel dezàn ;
Mirit ha grit d'oc'h oll guizien
Observi erfat e lezen.

Ar c'hont, goude e drugareqât,

Demeus e oll avizou mad,
 Er pedas da rei da anaout
 Petra a c'hoantaje da gaout.

Ne meus ezom, eme Goulc'hen,
 Eus a nep madou terrien;
 Mæs m'ar oc'h eus ar volontez
 Da rei merq eus ho largentez.

Evit ar victor oc'h eus bet
 Er c'harter-ma var ar barbaret,
 Liqit batissa da Zoue
 Eun iliz amàn er c'hontre.

Ar c'hont, joaüs eus e avis,
 A ras batissa eun iliz
 Evit servichout da vemor
 En oll amzer eus ar victor.

Eus a neuze e comanças
 Da veza dalempredet bras;
 Eus ar pêvar c'horn a Leon
 E teu ar bobl e procession.

Evit trugareqât Doue
 Da veza great ar faveur-ze,
 Hag e bedi da genderc'hel
 D'o frezervi diouc'h ar brezel.

Er plag devot-ze, Sant Goulc'hen
 A lavare an oferen
 Ha coves ar belerinet,
 Pa voe penitancer hanvet.

Gant an amzer goude e varo
 E voe roet d'an ilis e hano;
 Doue, e faveur e zervicher,
 A reas burzudou hep niver.



SANT GOULC'HEN E PELERINACH.

Var ton : Prezantomp oll.

SANT PAOL, qenta escop a Leon,
Oc'h anaout ar vertuz guirion
Eus a C'houlc'hen, a degas da ober
Anezàn e benitancer.

Hag en e glénvet diveza,
Pa velas an oll o ouela
Gant ar c'heus o devoa d'o zad
A zantent a yê d'o c'huitat.

E lavarias, o vusc'hoarzin,
D'e zuccessor Cetonerin :
Na gemerit qet a neac'h,
Dougit gant courach ho peac'h.

En ho plaç e teuy o coude
Eur servicher bras da Zoue,
A zo eur Goulm-ven guir hanvet,
Carget gant Doue eus a speret.

Ennes a deuy da echùï,
Dre bêvar c'horn an escopti,
Ar pez hon eus-ni comancet,
Hag a velo an errol purjet.

Souden, en oad a gant-daou vloas,
E tecedas en enez Vatz,
Goude beza profetizet
Ar pez on eus brêma canet.

Pêvar bloas qent eget mervel
En devoa bet leqêt e envel
Hag ive sacri en e blaç

Celomerin, leun a c'hraç.

Ema Edor eiz vloas goude
Ma voa eat e vestr d'an eê,
E c'houarnas an escopti
Gant cals a boan hag a zourci.

Goude maro Cetomerin
E c'herruas ar poent erfin
En devoa Doue tevelet
D'hor patron Paol en Ezced.

Inspiret e voe da lemel
Demeus a zindan ar boezel
Ar c'houlaoüen a voa qer sclær
Ho d'el laqat er c'hantoler.

An ilis a lean a eur vouez,
Beleyen ha pobl assambles
Evit o escop a choazas
Goulc'hen, penitancier bras.

Pa gêvas Goulc'hen ar c'hêlou,
A dennas forz huanadou,
Hag o sonjal evita'r beach,
E qemeraz soudan an teach.

Lezel a reas e ermitach,
Ha dissimul e zeas e beach
Da glasq eur plaç; benac distro',
Na glefjet anezàn hano.

Esper en devoa etre tant,
Pa n'er c'hafjet er vro prezant,
E vije'r bobl oblijet mad
Da choas eun all evit prelat.

Rac en e galon e crede
E voa indign eus ar garg-se,

Hag e voa eun dentation
A orgouil hag a ambition.

Dispos a eure e veach
Var zu Rom e pelerinach,
Da vizita ar plaçou zentel,
Ilis ha beziou an ebestel.

E Leon e savas neach,
Pa na gavet en ebleach
Ar personach choazet ganto
Da laqat var an tron gollo.

En eun afer qen important
Voe deputed tud a sqiant
Da vont da Rom da gonsulti
Pe façon en em gomporti.

Er Sich Santel dar poent-se
Voa azezet eun den Doue,
Eur zant bras, ar chenta Gregor,
Unan eus ar pêvar Doctor.

Ar pab a voe informet mad
Qent ma cherruas ar gannat
Var sujet ar gomission
Ma voant diblacet a Leon.

Dre revelation divin
En devoa gouezet o dessin,
Ha pront gant eur vizach contant
E roas dar choas grêt e assant.

Goulchen a zonje dan amzer
Beza evitet an danger,
Ha n'en devoa doutet morse
E teujet d'e glasq a geit-se.

E Rom pa edo erruet,

En em gave oll consolet,
 Finissa gante e vuez
 Er gær-ze leun a zantelez.

An deiz, an nos a dremen
 Eus an eil station d'eben;
 Dre ma teu ha ma za, ne vel
 Nemet partout lec'hiou santel.

Amàn a zindan an auter
 E repos relegou Sant Per;
 Er memes ilis, tro al lass,
 E veler bolziou pabet bras.

An darn-vuya eus anezo
 Evit ar feiz zo maro;
 Hor pelerin a garre'r vad
 Scuilla evelto e c'hoad.

Var ar menez zo e qichen
 E veler merqet ar blacen
 E peini Sant Per a varvas,
 E ben d'an traon staget er groas.

Eus an daou gostez d'ar rivier
 E zeus corfou sent ep niver,
 En ilizou ar re gaëra
 A ouffe dorn den da vatissa.

Dar guerc'hezet eun niver bras:
 Agnes, Bibiana, Anastas,
 Praxed, Domitild, Martina,
 Eujenia ha Zilisprisca.

Ha cals re-all odeyeus grêt
 Da Zoue vœu eus o gouerc'hdet,
 Hag o deus bet d'e c'honservi
 Gouzanvet ar verzerenti.

Ne rê qamet dre ruyou Rom,
 Na zivere an daelou tom
 Diouch e vizach var ar pave,
 O vedita dre ma qerze.

Ne lêge enep plaç e droad
 Ne voa bet trempet gant ar goad
 Eus a verzerien bet treinet
 Abars pe goude o deced.

An teatr a Vespasian
 Zo eur blenen franq ha ledan,
 Cernet eus a edifiçou,
 Rond hag huel an estachou.

Achano ar bobl azezet
 A alle guelet ha clêvet
 Er plaç e voa bet al lis
 Eus a bep seurt combajou trist,
 Cavernou a voa a izel,
 A bep seurt nouveans cruel,
 Pere a leusqet a vaden
 Da zevori ar verzerien.

Guech e rê Doue miraclou
 D'o frezervi diouch o c'hriffou,
 Pere, p'o losqet a vanden,
 A zê da lipat o daouarn.

Guech e reugent ar verzerien,
 E teuent en un taol d'o dispen;
 Eno, dre zent al leonet,
 E voe Sant Ignaç malet.

Mar deue al loënet guez d'o espern
 Hep touch o c'hig nag o esqern,
 E lavare'r bobl didruez

E voant tud leun a sorcerez.

Hag abars fin ar spectaclou,

Êt al loënet guez d'o zoullou,

E troc'het hini da hini

O fennou dezo gant bouc'hili.

Ar blacen a neue alies

Gant ar goad eus al lazerez;

Rag nouz' pet cant devez a voa

A leqet diouc'h-tu da laza.

Contet voe en ur miz hepquen,

Voa merzeret seiteq mil den:

Piou na deufe da denerat,

O sonjal en o lennad goad.

Eus ac'han an treuz zo bian

Da eruout en ilis Latran,

Pini e deus ar privilach

Da veza'r genta er gristenach.

Er vam-mâ eus an ilizou,

Ez eus eun daol-vras relegou,

Var an daol enni e veler

Ma coanias diveza hor Zalver.

Ilis Santez-Mari'r vrassa,

Zo unan eus ar re genta;

Eus a Vethleem ar marchossi

A zo bet digasset dezi.

Treuzet e vez oll ar galon

A joa hag a zevocion,

O velet e c'hars ar c'havel

Gant he Mab ar Verc'hez santel.

Goude'r joa e c'herru ar c'hlem:

En ilis Croas-Jerusalem

E zeus eul leuren a zouar
Transportet a venez Calvar.

Pebes ardeur, pebes anqen
A zantas er plaç-mâ Goulc'hen,
Oc'h adori ar groas trempet
A hoad hor Zalver beniget!

Beza ez eus c'hoas ilizou
En diavæs eus ar muriou:
Teir eus ar seiz principala
A gustumer da vizita.

Ilis Sant-Paol, e pehini
Ema e gorf o repozi,
Hag ilis Sant Sebastien
Gant eur vèred en e c'hichen.

Eno, a zindan ar vaoutou,
E zeus cals demeus a veziou,
Hag er re-ze ec'h enterient
Corfou'r verzerien, p'o c'havent.

Eus ac'hano eo e tenner
Relegou a zistribuer
D'ar belerinet aviziou
D'o enori en o broyou.

Ilis Sant-Lorans emæs kær
A gonserv e gorf en antier,
Hag ar grill ruziet gant an tan,
Hag assambles corf Sant Stephan.

Ar gálon a deu da doma
Dirag bez an daou verzer-mâ,
O consideri peger cre
Voa enne carantez Doue.

Edra m'edo hor Zant Goulc'hen

Ravisset oll en e beden,
 En unan ar stationou
 E zrempe beuzet en e zaëlou.

Leonis, da bere ar pab
 En d'oa roet urz da glasq mat,
 En anaveas gant souëz,
 Hag en distreinjont d'ar palez.

Ar pab, gant eur vizach laouen,
 A lavaras dezàn : Goulchen,
 Sonjit petra eure Jonas,
 Pella ma c'hallas e tec'has.

Rag aon da vont da Ninive,
 D'anong an urzou a Zoue,
 Ec'h otreas beza tolet
 Er mor da voüed d'ar pesqet.

Ar balen a ben tri devez
 En dislonqas var bord an træz;
 E c'hars kær a gonvertissas
 Gant ar pemp gomz a lavaras.

Me a voar dre experiang
 Eo inutil pep pouveang
 Enep ar volontez divin
 Rac netra ne zervichas din.

O clasq evita'r garg ponner
 Ne zere qet oc'h eur pec'her,
 E c'his men em santàn siouas
 En eur c'havarn m'en em guzas.

Hep dale ouen cavet eno,
 Ha tennet e ouen eus ac'hano;
 Soubla renqis, daoust da neac'h,
 Va diou scoas dindan ar beac'h.

Ha netra c'houlennit-ù qen,
 Ententit mat, va mab Goulc'hen,
 Nemet ma ve accomplisset
 Bolontez Doue en och andret.

Me zisclær deoch ez eo Doue
 Neb a fel dezàn qement-se;
 Rag-se, var ben varc'hoas vintin,
 En eur breparit, m'o sacrin.

Antronos, ar pab Gregor-bras
 Gant e zaouarn propr er zacras,
 Ha gant e venediction,
 Er chassas da chouarn Leon.

~~~~~  
 SANT GOULC'HEN, ESCOB A LEON.

*Var ton Guerz Coadri.*

**P**A voe clêvet en escopti  
 E voa Goulc'hen o tistrei  
 Demeus a Rom gant o c'hannad  
 Hag en consacret da brelat.

Eur joa dreist-muzur a zavas,  
 Hag an devez ma cherruas  
 Bras ha bian e zêt a steyou  
 De zigemeret en henchou.

E gundui a rejont ractal  
 E triumph bras d'ar gatredal,  
 Ha var e dron gant cals a joa  
 El leqejont da azeza.

Tregerni rê an ilis veur  
 Gant ar muziq a rent er c'hœur,  
 O renta da Zoue graçou



A ger bras niver faveuriou.

Ne squizent qet oc'h admira  
Ar brovidanç er pez a ra,

O trei'r pez control a ra'n dud  
Da erruout ato en e but.

Goulc'hen o tec'hel eus ar vro  
En em belle var e veno  
Diouc'h ar garg ma voa bet choazet,  
Ha nemet qeit ma voe samet.

P'en em velas al loman fur  
Fiziet enna'r sclaf hag ar star,  
E laqas e zorn a zevri  
Var ar varen d'e chundui.

Commanç a ra dre vizita  
Ar paressiou, dre ma za  
E laqa repari ar gouallou  
D devoa grêt an armeou.

Rag bez e zoant deut da ziscar  
Lies ilis res an douar;  
Re-all a voa interdisset,  
Bed merchossiou d'o roncet.

Cals a gavet a vêrejou  
Profanet, pe dre ar muntrou  
O devoa enno cometet,  
Pe o c'henterrî infidelet.

Red e voa commanç dre ringa,  
O teulel er meas ar rema,  
Ar viltanç udur, ha goude  
O asvinigen adare.

Re-all a renqet da zével  
A nevez flam goude'r brezel;



Ar pezh n'ellet get en un dro,  
 Qement voa ruinet ar vro.

Abars nemeur dre' zourci vras  
 Hon escob santel a la gas  
 An traou pep'ini en e renq,  
 Guell eget na voant diagent.

Hogen e nebeuta sourci  
 A voa da laqat repara  
 An ilizou materiel  
 Escoas ar re spirituel.

Ec'his ma zeo ar bobl fidel  
 Templou beo d'ar Speret-Santel,  
 Brassa acqet ar pastor mad  
 Voa diouc'h ar vigou o netât.

Goas distruch a ra ar pec'het  
 En eun ene pa vez antret  
 Eget a ra var an douar  
 Un arme oll a dud barbar.

Dre ma zê, e genta dessin  
 Voa da repara ar ruin  
 A rê c'hoas ar c'hiz ancien  
 A supersticion payen.

Ho zud cos abars ar feiz  
 O devoa custumou direiz  
 Da enori ho doueou  
 Dre festou, dans ha c'hoariou.

Recevet an anaoudegez  
 Eus ar guir lezen a vuez,  
 En em gontantjont, an dud dall,  
 Da chench objet d'o gisjou fall.

E léc'h adori idolou



Evel diarog dre zansou ;  
 En enor da Zoue ha d'ar zænt ;  
 E rent o ebat evel qent.

D'ar zul ha d'ar goueliou berzet  
 Dre'r vro nemet dans ne-velet ;  
 Mar dêt nep tu da bardona ,  
 Nemet evit dansal ne doa.

Sant Paol hag e zuccessoret  
 O devoa bet avoalc'h eriet  
 Enep ar profanacion  
 A rêt eus ar zul e Leon.

Mæs er c'hustum voa eur c'hrizien  
 N'allet qet e zrocha a gren :  
 Bremâ , goude daouzeg-cant vloas ,  
 E teu da vourjonenna c'hoas.

Gant an dud yaouanq voa pompad  
 Heulia exempl ho mam hag ho zad ,  
 Hag ar rema voa farç ganto  
 Caout bugale envel outo.

E commançamant e amzer  
 Ho zad a voa bet eun danser ;  
 Ho mam a voa bet danserez  
 Qent mont da forcha tiegez.

Tud cos a veljac'h forbuet ;  
 Dalc'het gant rhem en ho c'herzet ,  
 O c'hoaze rê vad d'ho c'halon  
 Clêvet eur zach biniou o son.

Sant Goulchen dre e istru santel  
 Hag e gomzou qen douç ha mel ,  
 A douchas qement o c'halon ,  
 Ma chenchont o gis diræzon.



Rei a ro dezo da gompren,  
 Mar boant bet scòet gant ar voalen  
 A justig Doue er brezelliou,  
 Voa abalamour d'o c'hrimou.

Hogen ispicial ar fae  
 A rent eus a gomzou Doue,  
 O neglija sul ha gouel  
 Ho deveriou spirituel.

Disquez a ras ar voyenou  
 Evit santifia'r zuliou,  
 Oc'h ordren asista en ofig  
 Da beb-unan en e ilis.

Ha ma vije'n oll en deiz-se  
 Occupet da zervich Doue,  
 E ras eur gourc'hemen expres  
 D'ober instru e pep pares.

Etre divez instruction  
 Evit ho recreacion,  
 E leqas ober canticou  
 Da gana e differant æriou.

D'an dud custum diouc'h al labour  
 Ne zeus netra qen disaour  
 Evel ma zê hed un devez  
 Chom defot labour da baouez.

Tud yaouanq zo re dibreder  
 En em dolo da voal ober;  
 Sul pe guel e vez peurvuia  
 Ma couezont er fotou brassa.

D'an tadou e recommande  
 Ober sul guel d'o bugale  
 Asista er c'hateqismou



Hag en oll instructionou.

Ha na vijent qet excuzet  
 Var digarez e zent disqet;  
 Ar re vras o deus alies  
 Ezom a gelenadurez.

Distrujet gant an abuzou;  
 Ha dre c'her ha dre stadudou;  
 Ne velet partout dre Leon  
 Nemet feiz ha devocion.

Aruout a ras e tretant  
 Eun affer a voa important;  
 Var sujet guir an escopti  
 N'ellet qet da abandoni.

Partial a ras a Leon,  
 Hag en em rentas e Roazon;  
 O prometi dont hep dale  
 Da gaout e zénved adare.

Mæs e Roazon pa erruas,  
 An derzien dom er c'hemerras;  
 Hag e ber amzer e vuez  
 En em gavas en he finvez.

E zacramanchou recevet,  
 E rentas e ene beniget,  
 Joais etre daouarn Doue,  
 Ar c'henta deiz a vis gouere.

E voa o c'huza d'an ampoent  
 E c'hozeg vloas ha tri-ugent;  
 Vardro pévarzeg vloas fournis  
 Voa bet pastor da leonis.

Er memes kær e voe enterret,  
 Ha Doue prest goude e zeced,



A ras miraclou var e vez,  
Da rei d'anaout e zantelez.

Sec'hit ho taélou, pobl Léon,  
Evit ho consolacion  
E zeus roet da bares Goulc'hen  
Eus e relegou eul loden.

En ilis m'en devoa alies  
Sacrifiet en e vuez,  
E continu da assista  
Qement en em erbet ountâ.

Burzudou bras hag eb niver  
Zo grêt eno a beb amzer,  
Hag er feunteun hag en ilis  
E faveur an dud clàn langis.

Invoqi a rer Sant Goulc'hen  
Ispicial ouc'h an derzien,  
Ous an tan goual pa vez recours  
Dezàn, e receveur sicour.

Eus a Vrest, eus a Lesneven  
E teu'r bobl e foul da Goulc'hen,  
A Vontroulez, a Landerne,  
Eus a Dreger hag a Gerne.

Deut, tud devot; mæs en ho peach  
Sonjit en e belerinach;  
Reglit-i diouc'h hini ar zant,  
Hag e tistrot d'ar gær contant.

An deiz diveza a vis even  
E tigor pardon e Goulc'hen,  
Induljanç plenier accordet  
Gant ar pab d'ar benitantet.



